

(386)

## Chanson.

Mam be me un tam amzer, pluen, liou, ha paper quenn,  
 Ur voutailhad quin em c'hichen, hac un tag pe ur veren,  
 Me laqafe em fantarzi da gomposi ur ganaouen.

Ouspren e credan e fot din, gent equet comanç he rima,  
 Speret da gomposi version, ha parfetiç da quenta,  
 Speret a rençin da gompren, ha mouez evit he c'hana.

Me en em laqa va-unan e faveur an oll voaset,  
 Da bledi dre adversite sinon an amourouset;  
 Ne ouffe den er c'honta din goel eridon, pa on goaset.

Me ya bremä d'ober al lez da ur plac'h yaouanq a garan,  
 Ha mar ro din-me audianç, ne vo get va goech diverza,  
 Da laret eo, d'am fantarzi, an hini a garan muid.

(387) Debonjour d'ec'h-u, plac'h yaouanq, cetu me deut d'ho quelet,  
 Gant esperanç dre garante c'hoant da verza soulaget,  
 Mar plich ganec'h e bermett, e contin d'ec'h ar sujet.

O va excusit, den yaouanq, rac me ne veritan get  
 Parlant diouzoç'h dre feçon, rac me vel e veritet  
 Ne oun get discours en cadanc, na biscoas na meus gouezet.

Me ne fell get din discouri nac aburzi va amzer,  
 Conta d'ec'h va adversite hac an darn eus va miser,  
 Ha d'ar fin beza soulaget, va douç, mar deo ho souhet.

Ha ma em eus en nep pouvoar da rei d'ec'h soulajamant,  
 ha capabl eus a nep feçon d'ho soulagi, den yaouanq,  
 L'houi a ell assuri bremä erzeus fin d'hoc'h oll dourmant.

342

Cetû amâ an dispartî, pepimi a ya d'ar quër;  
 Allas! ar paour qez amoureux en deveus pell da ober  
 Adreus ar veij hac ar poullou, hac al loar ne voa qet sclër.

Pa êrus ebars er quër, leun a chagrin e speret,  
 Noc'h eus micher da laqat mar, èt vo e dud da gousqet,  
 Tremen a rays hep e goan, ne gredo qet quer lavaret. (388)

Epad ar zuin <sup>(1)</sup> var e labour, e speret e vurmuri,  
 Joa en e galon, hep seblant, o clèvet comz anezi,  
 O chom calet var e labour hed an heur o sonjal enni.

D'ar zil e zayo adare, ha mal gantàn he quelet,  
 Hac e ra dêi ar reverans, gant henor ha gant respect:  
 Debonjour dèc'h-u, plac'h yaouanq, c'houi eo rouanes va speret.

Ha dèc'h-hu joa, va zervicher, p'o quelàn me zo ceder;  
 Bras e ve an avantach din, mam bije bet ar boner  
 Da veza rouanes d'ho speret, ra[E] va hini zo dister.

Va mestrez c'houi zo un objet hac a zezir va c'halon,  
 Va fantazi gouley ourzoc'h ha me eo ho quir vignon,  
 Ha d'ar fin beza priejou: cetû arze va rêson.

Va mignon, c'houi a zo un den hac a zezir va speret,  
 Amitié ameus evidoc'h, gant an amzer e velfet.  
 Adieu eta, va zervicher, qen a vo ar c'henta quelet. (389)

Bras e zeo sur an amitié a zo entre an daou zen-mâ,  
 Mallos d'ar quell deod milliquet a deu d'o dispartia. (2)

Debonjour dèc'h, Eliedic, ha dèc'h-u joa, va moereb,  
 En han' Doue, plac'hiq yaouanq, roit din un dra benaqet,  
 Ha me rey ho courc'hemenou d'ho servicher, mar qeret.

Leverit d'in, va moereb coz, un dra benac a neve  
 Eus a zoare va zervicher; c'houi a zo eus ar c'hontre,

(1). - Le ms. porte "zuin"; il faut lire: zuin (trig) = zirzun (Leon), semaine.

(2). - Le ms. de Lédan n'a que 2 vers; la 3<sup>e</sup> ligne est laissée en blanc.

343

Hac é'n a zo un den vaillant, ha brudet mad é'n a ve.

Leal, va merc'h, den vaillant eo, ha den a speret memes,  
Laqat a rei comz anezan, ma na gar laqat eves:  
Evet on deus daou vevne lez, va merc'h gan[t] e dam crampoes.

(390) Lavarit din, va moereb coz, petra sinifi an dra se;  
Pel a zo e clasgen unan a gontje din e zoare;  
Ch. — en boa e voa ur goas coant, hac e fezon e zibcoe.

Va merc'h, hep flatal ar c'hortou, ennes a gar ar merc'hed,  
Bete memes ma lavarar en deveus o re gallet;  
Efer quin, c'hoarier cartou, ha butuner obstinet.

Lavarit dean, va moereb coz, na deuy mui d'am darempred;  
N'en deus nac honor na profit o rei penn d'ur seurt goabet;  
Adieu eta, va moereb coz, qen a vo ar c'henta quelet.

(Vol. III, pages 386-390.)  
22 str. numérotées.